

## DIRESIS AN DAZONT

**D'ar yaou 26/11 e oa bodet e Monteneg (56) an holl aozadurioù a bled gant klasoù war ar maez. Ha n'eo ket sklaer o dazont.**

Serret eo c'hoazh an tiez a zigor klasoù natur e Breizh, troet ma vez ar minister war-zu ar pal plediñ gant mont-en-dro ar skolioù da gentañ penn. Ha koulskoude e fell d'an aozadurioù evel REEB, UNAT, CPIE pe Ubapar, diskouez e kontont kalz evit ekonomiezh ar vro, gant o 500 000 nozvezh, o 3 milion



a dud o taremprediñ o savadurioù bep bloaz. Evit an Ubapar, da skouer, e strollont 7 kreizenn natur dasparzhet e Breizh, a implij en holl ur 75 ETP. "Kollet o deus 80 % eus o fratikoù, etre 40 000 ha 350 000€ ha riskloù a zo e serrfe lod da vat, pa ne vint ket evit gortoz un amzer welloc'h." eme Riwanon an Habask evit an Ubapar. Ha n'eo ket Dorig ar C'hras, e Tremargad, a lâro ar c'hontrol. "Kollet hon eus, ni, war-dro 50 000-60 000 € abalamour d'ar c'hlasadoù n'int ket deuet."

YA. NUS 810 - 18/11/22